

# CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouit, ma mignonnet,  
Chanson an amourousted  
A zo gent eur c'hernevad vit an deio composet

Amourouset zo eur guer  
Hac a zo douç a tener  
Caus he da vil nec'hamant hag ive da vil mizer  
Pa vo an noz pe an de  
Daou zen yaouank a goste  
Quent ma c'houfeong doare he c'harivo gante.

Ar pot a goze brao  
Hac ar plac'h a deuz foa.  
Evit beza evurus na fot nemet eun dra  
Amourouset a ra dhe  
Dimezi hep dale.

Pa vouing neve eureget,  
Vad a ra d'he n'em velet,  
Casi na ra met unan an ozac'h hag ar vreg.

Quen bras e ar garante  
Ha quen bras an amilie  
Neus an eil vit eguile hag en noz hag en de,  
Ho ra deze lavaret  
Pell zo cleyemp beza dimeet.

Tudou yaouanc, me ho péd,  
Memes tra divoallet,  
Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet

Guelet a meump a vejou  
Cals a chanchamançhou,  
Er menajou e caver hep sort ambarrassou,  
Pa zeu en tieguezou  
Cals deus a bouponou,



Dg

## — 2 —

Unan a c'houlen crampoes  
 Hac eun all galeiez.  
 Eun all zo en he gavel ho clasq donet er mez.

Ar vreg so dre an ti  
 Vel pa xe eloundi.  
 Na neus den evit elevel reson vad ebet ganti.

Fachet e deus e fried  
 Adieu d'an amouroustet.  
 Tud yaouane, mar em c'hredet,  
 Lacait eves, diouallet,  
 C'houi he an evurusan tud a so voar ar bed.

C'houi sa dre ar pardonnioù  
 Ha dre an assambleou,  
 O tansal, o c'hebattal, o c'hevan taquennou,  
 Eun den yaouanc, mar gue fur  
 So parfet he blijadur.  
 Hac a re zo dimezet  
 An dərn vuyan meus goelet  
 A vanque eun dra benag dalc'hmad do evurusted.

Darn so hac a laer ar yalc'h  
 An darn all e ya war varc'h.  
 Re alla gar ar chopin, quent azvent me wawalc'h.  
 Tud yaouane, mar dimeet  
 Choaset tud for a parfet.

## PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan  
 Souhaiti ferm a ran  
 Yec'het d'an daou zen neve, onanç ha prosperite.  
 Men o ped, camaradet,  
 Vit eur farç ne fachet ket ;  
 Permettet e badinal en tre ar vignonnet,  
 Graç dimp da nem gavet c'hoas  
 Joaus evel biscoas  
 Ben an-den-ma pen eur blos, ebars armemess plac  
 Ho trinka gant o goeren.  
 Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE.